


An nor a blij din ar muiañ

Ar «c'hourt métrange» am eus dibabet eo an hini am eus kavet ar gwellañ:

«Dernière porte au sud». Ar berrfilm-se a zo bet graet gant ur Beljiad anvet Sacha Feiner e Beljia e 2014. N'ez eus ket aktourion wir met tudennoù e silikon.



Me am eus kavet mat-tre ar berrfilm-se peogwir eo iskis d'an neubeutañ, ha pal «Court-Métrange» eo: ur paotr bihan en deus ur penn siamat bev ha komz a ra gantañ (ha koulskoude «Toto» ne gomz ket ar memes yezh hag eñ). Ouzhpenn-se, ar senario a zo dic'hortoz: me n'em eus gwelet james klevet un istor evel-se. Evidon, ar berrfilmoù all hon eus gwelet a oa enno traoù gwelet dija, ha domaj eo.

Ar fed ma en deus dibabet ar sevener ober ar berrfilm gant tudennoù e silikon a zegas ur riskl: gwelet an aktourion o c'hoari fall.

Mouezh ar paotr bihan a zo fentus hag un tammig iskis (evel e neuz) hag e dinammded a zo abalamour ma n'eo ket aet er-maez eus maner bras ar familh, a lak anezhañ da vezhañ hoalus.

Evidon, ar fin a zo graet mat, rak c'hoant am boa da c'houzout ar pezh a vije bet goude, gouzout penaos ar paotr hep anv a zo o vont da vevañ, penaos en em zibabo e -unan er bed gwir.

Kavet em eus mat ivez ar c'hlinkadur, evel klinkadur eus euzhfilm e oa, bras oa.

Me gav din oa mat ivez da lakaat ar film e gwenn ha du peogwir e lak ar berrfilm spuronusañ (hag ivez peogwir eo liv ar banniel breizh ;- ) ).

Ar «bo» (bandenn-son) a zo graet a-zoare rak tout ar son oa e juntr gant ar skeudennoù.

Awen Rolland, 204 Lise Jean Macé Roazhon